

DIWAR BENN AN ELECTIONOU KENTAN.

MARZ AR BLEIZ HAG AL LOUARN

War don ar Seiz skient naturel, pe eun all



Pa 'welan krag-Otrone a bep tu dic'houanet,
Ho chupen verr, ho bragou war ho c'hofi-kar péget,
O c'hadan en Breiz-Izel peb-unan he ali,
Perag ne larfenn-me ket, me Breton ma c'hini ?

N'eo ket awalc'h, Otrone, vel péget en eur c'hoad,
N'eo ket d'ac'h lampet ha goude gragaillad :
Eur zell, hep-ken, eur zellik war an treo tremened,
Ar pezh hoc'h euz-hu gret dec'h, arc'hoaz en adréfet.

Hirie a zo pevar bla a oa tanet ar vro,
Dre oll, Breiziz, a ruille ho koad a boulado ;
Nag a diadou zéder gand ar brezel karzet,
Nag a potr vad hep-eom war-zu Franz strahinet !

Nag a vammou a wéliz ho fenn war ho barlen,
En-tal an tan azéet o oelan ho mibien,
Ho bugale ruillet en tachen ar brezel,
Pe ~~marvet~~ pell diouz ho mamm, diouz ho bro Breiz-Izel !

Leret : piou 'zo bet kiriek da gement a daclou,
Piou en euz ker kaer béget karrigel an Ankou ?
Mar n'en eo **Napoleon**, leret d'he vignoned
Diskouen skler ar wirione : neuze voint chileouet.

Mar deu gant-he ho friou da vénel war ar gleut,
Bet sur dimeuz ma c'homjou na reint kalz a steud :
Reit eta d'an **Duk ar Feltr**, potred vad Breiz-Izel,
Reit ho moejou, mar keret, — ha goude **d'ar brezel** !

Mar 'zo c'hoaz tud kalonek dindan lagad an de,
Man 'r Vretoned da gentan, ann oll 'oar kement-ze ;
Stourm a reont pa ve ret, ha pa 'de fuzuillou,
Mez n'oullont ket 've zavet brezel war benn kojou :

Nan, n'oullont ket 've zavet brezel war benn kojou,
Ha kouskoude, **Bonaparte** en grez liez gwechou :
Ar wech diwean gant-han en kreiz an lan boutet
Ar *zoudard 'zo bet dewet, hag én 'zo 'n em dennet.*

Mar 'red c'hoaz 'n ho koaziou goad ar Vretoned koz,
Evel-d-on war an *treitour* tollet ho cill yaloz !
Pell awalc'h en euz *goadet* **NAPOLÉON** ar vro.....
Foei, foei d'he oll vignoned, foei d'ho vrézégenno !!

Gwir eo en-pad ugent vla ec'h omp bet evuruz ,
 Dindan han d'al labourer ar werz oa talvouduz ,
 Mez aboue m'en euz tenaef bleiz ar Pruss en hon bro ,
 E renkomp kas da Baris lod vraz dez hon mado .

Ar Franz moustret didrue gaud Soudardet Guillo ,
 En-pad eur bla hon mibien kousket en tachenno ,
 Broiou kaer , *pemp mit jard* gant Bismark d'imp lonket ,
 Chetu ar pez 'n euz kou stet ugeat vla 'eurusted !

Breman , Potred vad Couli , leret , en berr-gomzou ,
 Piou a deu gaud Duk ar Feltr da gestal ho mœjou ?
 En KERFANK , a lar an dud , oa officer barwek .
 Ha didan ar Republik préfet en San-Briek ?

Ia , pemzek de ec'h eo bet mestr al louzouerien
 A oa karget en Kouli dimeuz ar glanvourien :
 Mez lavar d'in , Breton mad , hag en c'henz-han gwélet
 Aliez'tal ar gwélé lec'h ma oaz gourvéet ?

Gwéchal goz ec'h ansave Bonapart da vignon ,
 Pa 'n eo kouet an Impalaer en deuz chanchet a zon ,
 Breman eo Republikan ha Republikan ru :
 Evit bean tra benag , eo ret d'ehan chanch tu ,

Ar C'hont Fouchez a Gareil a zo Republikan ,
 Mignon braz da **C'hambetta** , klevet , braz ha bian !
 Mignon braz da **CHAMBETTA** an hini hon voutaz ,
 Ilon voutaz oll en Couli da vervel *evet chas* ! !

Couli ! o gwasan tachen , gwasan bro a c'hlac'har !
 Nan , biskoaz na oe gwelet gwasoc'h war an douar !
 Gant **HON MAMM ar Republik** oa choazet da verred ,
 Evid-omp-ni , tudou kez , evid-omp , Bretoned .

Gant potred ar Republik Paris 'zo bet tanet ,
 Hag ar palejou kaeran heb-eom diskaret ;
 Piou a beo adzevel , pa vo red en ober ?
 Piou ? An dud a boan arre , ar paour kez labourer .

Evit ar C'hont a Gareil , votet breman , tudo ,
 Pe 'n eo gwir na c'houlen den votan vit-han 'n he vro !
 Evit-me na c'houlan tam bean diou wech tapet ,
 Na gant lern ar Republik , na gant Bonaparted .

N'hon na kure , na person , na mu potr ar Roue ,
Breton 'on ha d'eur Breton a roin ma mouez ive ;
KERJEGU eo he hano , eur c'hoz voraer diskuiz ,
 Hag a laro pez 'zo gwir da botred fin Paris !

Chetu aze ma sonj-me dira-z-oc'h digoget ,
 Mar kevet gwell , kemeret ar gwell-ze , Bretoned ;
 Evid-ze na fachin ket , bepred 'karin ma Bro .
 Hag evit-hi ec'h in c'hoaz gan-hac'h d'ar brezelio !

IANN C'HOUER.